

Klemmou ha Tristidigez al labourien war ar Mêziou

(War an ton a gerfoc'h)

1

O klevet kement a glemmou,
Gant labourien ar mêziou,
N'oun evit miret da skriva
Eur zon de meus ar re drista.

2

Eur pennad mad rok ar Brezel,
Gant ma zad pa oan c'hoaz bugel
Hom daou e labouremp bemde,
Dre gêriadennou hor c'hontre.

3

Dar mare-ze ar gwerigen
O devoa kals a binijen.
Goude labourer pad ar bloa
Ne zastument kagi netra.

4

Aboe pell-ze va c'henvroiz
An traou a gerze mad iskiz.
Betek ar bloavez tremenet
Ar prizioù a zo izelet.

5

Mez ar pezh a renk da brena
A zoug prizioù an huella.
Setu perak va mignonned
E zeus kals a dud glac'haret.

6

N'euz ket pell c'hoaz e n'oll foariou
E raed arc'hant a viturioù.
Na pegement a chanchamant,
Pa zisken ar mil da bemp kant.

7

Ar chatal-gorn hag ar c'hezeg,
Ar memez kond vel priz an ed
Zo diskenned euz an hanter.
Pebes malheur d'ar paourkaez kouer.

8

Ar patatez, an danvez-tan
O c'has er meaz zo kalz a boan,
Ha kement tra n'deus da werza
A zo en prizioù izella.

9

Goude c'houezenn vras an domder,
Pa vez gant e diad er gêr,
Do c'hortoz monet da gousket,
En kompagnunez e bried.

10

Skuiz meur wec'h ha diez o fenn,
O sonjal ebars an termen
E renfer paea an otrou,
Heb ankounac'hat an taillou.

11

Eus a bep lec'h c'houler arc'hant
Digant ar paour kêz paizant,
Assuransou e pep feson.
Neus nemed poan ha rann 'galon.

12

Met dre ma zeo ken ker ar boued,
All labourioù ne gerzont ket,
An eil o klemm war egile,
Klask gounid o zamig bue.

13

Darn 'ra breman fortunioù bras,
Eul lodenn all 'zo war an noaz.
Mall bras eo dezo holl disken
Arok amzer ar binijenn.

14

Tregont dre gant, da neubeuta,
E tlefent disken war beb tra,
Ze ne rafet c'hoaz eun hanter
Evel ma e deut traou ar c'houer.

15

Mes a re a douch ar muia
'Ra skouarn vouzar da genta,
Den c'houlenn diskenn war e briz.
Kement-se zo eun dra iskiz.

16

Goulskoude tleomp komprenn mad,
Omp bugale d'ar memez tad,
A c'hourchemen da beb bini,
D'an nesa gaouebet na ri.

17

Pa vo heulet e c'hourc'hemen,
E peb bro gant ar gristenien
War ar mêz koulz hag er c'hêriou,
E vo euvrusoc'h ar poblou.

18

Pep hini c'hanomp 'serr e boan,
E c'helfomp holl bras ha bian
Beva evel c'hoaz n'euz ket pell,
Evrus en hon bro Breiz-Izel.

19

Eul lestr e kreiz ar mor kollet
A gemer aon rak ar garreg,
Mes en eur zenti deus ar stur,
'Nem gavo er porz a dra zur.

20

Evit domp-ni, er memez tra,
Renomp ar vag deus hor gwella,
'Nem zikouomp var an douar,
Kouls er joa evel ar glac'har.

21

Kourach ! bepred, labourerien,
A buan e teufomp a benn
Da lakat fin dar gwall amzer
A dremen dre ar bed antier.

22

Bretoned, en eur echui,
Kasit va zon ganeoc'h d'ho ti,
Diskit hi emberr penn-da-benn,
Sentit mad deus he gourc'hemen

23

Ha ma vez ar goanv kalet,
Et tal an tan korn an oalet,
C'hui her c'hano d'ho tudou koz,
Ma kavint kals berroc'h an noz.

24

En eur gana va c'hanaouenn,
C'houi rayo enor c'hoaz ouspenn
Da Vreiz-Izel, hon bro dispar,
Brudet dre oll var an douar.

Emile GALLIC,

Kaner Brezonnek, Plougonven.

(Tous droits réservés.)